


# HISTOR ADMIRABL D'EMEUS ar BOUDEDEO

*Pehini, abaoe maro hor Zalver, ne ra nemet bale nos ha deiz ac'hann da fin ar bed, abalamour d'an effronteri an devoa bet en andret hor Zalver Jesus-Christ, pehini, pa voa o cont d'ar maro, a falvezas dezân disquiza var e stal, hac e teuas d'en rebuti evel eur scelerat.*



Asistantet enorabl, tostaït da glêvet  
Ar vuez pitoyapla a voe biscoas ar bed ;  
An histor zo truezus demeure ar Boudedeo.  
A zo nôs-deiz o vale aboe hor Zalver maro.

Eus a tribu Nephtali, a guer Jerusalem,  
Voa ganet Absarius, carguet a anathem ;  
Dont a ras ar bed-mâ en amzer Herodes.  
A felveas massacri Jesus, Mab ar Verc'hez.

Va zad a voa ur c'halve, va mam kemennerez,  
Hac a labouré en Templ da ober broderes ;  
Ha va c'herent am desqas da lenn leor al lezen.  
Hac hini ar Brofetet ivez a dra certen.

Goude e voen demeet gant va c'herent afin,  
Da eur vreg fur a prudant a tribu Benjamin,  
A bini'm boe tri buguel en amzer ma teuas  
Autrou Sant Yan Badezour d'annone ar Messias.

Sant Yan a gonvertissas calz eus ar bayanet  
Pere voa idolatret, caledet er pec'het ;  
Dec mil den en eun devez en deveus badeet,  
Me, ma greg, va bugale e voamp bet o velet.

Va greg a lavaras din : va fried, emezi,  
Lekomb en em vadezi, enont ê ar Messi ;  
Ha me o respont dezi gant un ear direspét :  
Na ni nac hor bugale ne vimp qet badeet.

Aben eun nebeut goude Sant Yan voe dibennet  
Dre urz roue Herodes, eun den cruel meurbet,  
Ha ma teuas hor Zalver evit ren en e blag ;  
Hac a ras dre ar c'hanton calz a viraclou bras.

Clêvet e meus bet Jesus alies o sermon,  
Hep ne meus bet profitet eus e bredication ;  
Va-unan e voa presant p'en doa rassaziet  
Dec mil den gant bomb bara ha goudeze pesquet.

Me Boudedeo maleürus a velas c'hoas souden  
Jesus o ressucita Lazar, breur Madalen,  
Ha güelet dibossedi calz a dud possedet,  
Ha sivoas din, pec'her bras, ne meus tam profitet.

Aben eun nebeut goude voe Jesus kemeret  
Gant calz eus a judevien er jardin Olivet,  
Ha condaonet gant Pilat da rancout da zouguen  
Ar groas ponner ha mezus evit ar bec'herien.

Var tou : GUERZ SANTEZ ANNA.

Pa voe ar groas achuet, hor Zalver voe samet,  
Da vont da venez Calvar da vea crucifiet ;  
O velet an dud o redec, me guemer va buguel,  
Ha me mont da dal an nôr pa yê en da vervel.

Cetu Jesus o tremen neuze abiou va zi,  
Pehini en tal va stal a deu da reposi,  
Ha me lavarât deân gant eur gomz arrogant ;  
Qé alesse euz va stal, te zo eun den mechant.

Ganes on dizenoret gant da effronteri,  
Pa quëlân o reposi amân e tal va zi ;  
Querz alesse, den ingrat, cos sorcer milliguet,  
Querz alesse d'ar maro, pe c'heus he meritet.

Jesus a resbontas din gant eur voez truezus :  
Mont a ran da bartia, den fall, den maleürus,  
Me reposo gant va Zad, te valeo bepret  
Dre bêvar c'horn ar bed-mâ ac'han da fin ar bed.

Ia, te valeo ac'han d'ar jugamant.  
Hac er c'hoste deo d'am Zad am velo suramaant  
O varni ar bec'herien pere voa condaonet  
Da vont d'ar flamou gries, ar re just d'ar joaüstet.

Pa glêvis comzou Jesus, va c'halon voa touchet.  
Ha me rêi va bugale eun istant d'am pried,  
Ma velis ar Veronic o sec'hi bisach Jesus,  
Ha chom en he mouchouer e boltret truezus.

He ellout n'em arrêti et heuillis hor Zalver.  
Hac e velis va Jesus ha calz graguez santel ;  
Ar bourrevien d'ar Verc'hez o deveus lavaret :  
Cetu amâ an tachou ma vo ho Mab staguët.

P'am boe güelet hor Zalver o vervel var ar groas  
E creiz etre an daon laer carguet a boanniou bras,  
Ha me commaç va beach gant calz eus a anquen,  
O tont da laret adieu d'ar guer Jerusalem.

Sonjit eñ, Bretonet, pegument a c'halc'har  
En deus ar Boudedeo bremâ var an douar !  
Rancout quïttat e gartier, e vreg, e vugale,  
Hep qimiadi diouto, evit atao bale.

Pa en devoe baleet eun nombr a vlaveziou.  
Ec' êruas en Eÿpt, pei bras demeure e vrô.  
Eno e mâ ar Mor-Rus, elec'h m'oe tremenet  
Moyses gant bobl Doue, hep cavout drouc ebet.





Mont a ris eus ac'hane da euzen Candi,  
Elec'h emedi en noas an dud a zo enni :  
Eno e velis eun tad o trec'hi a damou  
E verc'h evit sacrifice da rêi d'o doucou.

Mont a ris da Malhodo, e pelec'h eus tud drol,  
Pere a ador Doue hac an diaoulou oll ;  
Pedi reont Doue da gaout prosperite,  
Hac an diaoul a bedont ne rai qet drouc dêze.

Güelet e meus er Japon ur vam meurbet cruel,  
Aini deuas da laza, sivoas, o daou buguel.  
Er vrô-ze ô permettet laza ar bugale  
Pa n'o deus quiet a vara da rêi dêze.

Goude quemeris an hent da vont d'an Enezi,  
D'an Americ, d'an Asi, ha neuze d'an Turqi.  
Ar graguez eus var vrô-se a vale d'an arme,  
Hac an ezac'h o deus soign demeus ar vugale.

Eno emedi ar c'his da laza ar brotret,  
Nemet unan dre famil na ve james miret.  
Be' o deus eur rouanez a ro commandamant  
Da laza an oll botret, hep caout dé nep damant.

Er guær eus a Garniol eus eur c'his drol meurbet,  
Rac eno an dud yaouanc, pa vezont eureujet.  
E rânco ar vreg yaouanc, nôs genta e heured  
Mont da gousqet gant ar prinç, vit beza enoret.

Bet on ebars eur c'hoad hanvet Cisaria,  
Elec'h ma eller bale cant leo d'an neubeuta  
Hep cayet dour da eva, na feunteun, na rivier,  
Ar pez zo goal incomod da oll dud ar c'hartier.

Monet a pis c'hoas pelloc'h, d'ar guær a Vosopa  
Pini zo eus he divoal eur prinç eus an drola :  
Ur vanden chaç a merc'het en deus evit gardou,  
Ha n'en deus qen soudardet evit difen e vrô.

Ac'hane'yis da eur guær zo hanvet Estopet.  
Elec'h ma zeus serpentet ha læned vil meurbet  
Zo qer teo ha corf un den sur ma vent muzuret  
O deveus d'an nebeuta daou-nguent troated hel.

Er spaç demeus a gant vloas ez on bet o vale,  
Ha me êruont adare em brô hac em c'hontre :  
Allas ! maro voa va greg coulz ha va vugale,  
Ha den ebet eus va brô certain n'am anavee.

Neuze e teuis da Rom, ebars en Itali,  
En amzer-ze e voa calz eus a c'hlac'har enni ;  
Güelet' ris marzeria nombr bras a gristenien,  
En defot ne renoncent d'o feiz ha do lezen.

Me a vale var ar môr coulz ha var an douar,  
Ha me partiel neuze evit ar Franç, bro ear ?  
E Marseille, Bourdel, Paris, Niort, Naonet, Lyon,  
Ac'hane da Vreiz-Izel, d'ar guær vrao á Roazon.

Güelet e meus Montroulez ne voa nemet eur c'hoad  
Ha güelet Brest ha Quimper ebars en douar prat,  
Ha güelet ar guær a Is en e frosperite,  
Hac ar gar á Lexovi a meus güelet ive.

Güelet e meus Breiz-Izel en coad ha menezion.  
Ma zont evel sovaget neuze ebars er vrô ;  
Me a vol calz a guæriou er vro-se batisset,  
A ra calz a chenhamant abaoue ma zon bet.

Me vel ar guær a Roazon eur guær gær batisset,  
Dol, Güenet ha Sant-Malo, Dinan hac an Naonet,  
Sant-Briec ha Landreguer, Lanion, Montroulez,  
Castel-Pol ha Lesneven ha Landerne ive.

Ar c'hæriou ze meus güelet e coad hac e prajou  
Pa deuis d'ober va veach genta ebars ar vrô ;  
Cetu batisset Quemper, ha Brest ha Recouvranç,  
Quemperle, Moelan, Kerahes ebars en assuranc.

Anfin, pa on condaonet gant Doue da vale,  
Me zo bet en em gavel e creiz meur a arme ;  
Canoliou a fusiliou, clezeyou, sabrennou,  
Netraa ne dê bet capabl de rêi din ar maro.

Bet on ebars en listri a zo bet perisset,  
Hac an dud a voa enne a meus güelet beuzet,  
Ha me hanvet Boudedeo n'em bije drouc ebet  
Comzou Doue a rânco bea accomplisset.

Condaonet e zon gantâ da chom var ar douar ;  
Comprenit oll christenien, emâ zo din glac'har !  
Va zourmanchou er bed-mâ biqen na êchuo  
Qen a deui Doue da varn ar beo hac ar maro.

Ar som eus a bemp goennee so em godel bepret  
James ganet nep seurt clenvel me ne don ataqet.  
Bet on ebars en broyou elec'h m'oa ar vocen,  
Hep na zeus staguet ouzin na clenvel nac anquen.

Va boutou na va dillat james na uzont qet,  
Dre bermission Doue a meus bet offancet ;  
Peder guæc'h a meus redet pêvar horn ar bed-mâ,  
Ha güelet e meus ive calz chenhamant enâ.

Bremâ e zon comancet da redec a bempet.  
Hep ne don ambarasset gant dibri na cousqet ;  
Güelet a meus be' broyou a zo be' oll revinêt  
Ha calz demeus a guærou gant ar gurun dêvet.

Ne meus qet calz amzer evit chom da barlant  
Me a gred e ma va zreid vargore glaou ardant,  
Nan, ne zeus nemet Doue a elfe disclêria  
Ar boanniou bras a soufrân qerqent ma reposân.

Pebes maleur ê din-me bea bet rebutet  
Demeus a guichen va stal Jesus Salver ar bed  
Pa voa ô vont d'ar maro, da zont da zisquiza  
Ha me neuze dre valeur a zeus d'e zispriza.

Emâ ê ar maleur bras a meus var ar bed-mâ !  
Emon atao o vale ouspen trivac'h cant vla,  
Ha c'hoas e rançân bale ac'han da fin ar bed :  
Pedit Doue evidon, ma zin d'ar joaistet.